

Aet eo an Aotrou da Bariz

(aus Bro Gwened)

Aet eo an Aotrou da Bariz,
'N day ket d'ar gêr 'raok triwec'h miz.

Roulomp ar geniterv, latira rouloñla
Roulomp ar geniterv, latira loñge

'N day ket d'ar gêr 'raok triwec'h miz,
Evit roulat e yaouankiz.

Matezh vihan 'skriv ur lizher,
'Lâr d'an aotrou donet d'ar gêr.

Hag e ta an aotrou d'ar gêr,
Kresket e dud ag an hanter.

'Tal ar maner na p'arruas,
Tri zaol àr an nor eñv a skoas.

Tri zaol àr an nor eñv a skoas,
Matezh vihan he digoras.

Matezh vihan, lârit-c'hwi din-me,
E-menn emañ ma maouezig-me ?

Ema-hi en he c'hambrig vihan,
E luskellat he 'hani diwezhañ.

Matezh vihan, lârit-c'hwi din-me,
Piv a zo tad d'ar c'hrouadur-se ?

N'hellan ket lâret piv eo e dad,
D'ar meliner eo hañval-mat.

Dam, kaezh aotrou, ne ouian ket,
D'ar meliner emañ hañvalet.

Digasit din ma chupenn c'hlas,
Hag ec'h an d'ar velin d'ar iaz.

Ma 'c'h an da gavout ar meliner,
Ha d'er goulenn da vout komper.

Boñjour deoc'h-c'hwi, kailh meliner,
Daet on d'ho klask da vout komper.

Dam kaezh aotrou, ne c'hellan ket,
Kar emañ ma melin 'n he bleud.

Kar emañ ma melin é tro,
Mar he laoskan, hi a dorro.

Gwir a lârit, kailh meliner,
'Deus ket moaien bout tad ha komper.